

## Koupal on:

### I. Kinng ar rannvro Breizh:

Lec'hiet eo e gwalarn Bro C'hall get 5 departamant(4 departamant en doare ofisiel). **Poblet-mat** eo Breizh get

3 163 000 annezad hag he c'hêrbenn: Roazhon: 7vet plas e Frañs. Chom a ra an dilabour edan live Bro c'hall

Diazezet eo an ekonomiezh àr ur **labour-douar produadour get ar sevel-loened askoridik hag ivez ar gounezhvouederezh**: kentañ rannvro gall eo Breizh evit ar produadur labour-douar.

**Met ar patrom labour-douar Breizhad produadurour a zo en arvar hag a ya enep d'an endro.** Ret eo kavet ur c'hempouez nevez hag ivez ivez un diorren padus evit an obererezhioù labour-douar ha gounezhvouederezh.

Diazezet eo ivez an ekonomiezh àr an **touristelezh en arvor àr ur vandennad pemzek kilometr.**

### II. Deskriviñ ar strollegezhioù tiriadel ha displegiñ an digreizennadur

Rannet e vez ar galloudoù etre ar Stad hag ar strollegezhioù tiriadel.

Kroget eo an digreizennadur get ar lezennoù Deferre e 1982 hag ivez get ar reform bonreizhel e 2003.

Pal al lezennoù-mañ eo bout tostoc'h doc'h buhez ar geodediz en o buhez bemdeziek .


Renet eo ar strollegezh tiriadel get bodadennoù dilennet get ar geodediz hag un den getañ ar galloud seveniñ (maer, preziant ar C'huzul Meur, Preziant ar c'huzul Rannvro) hag ivez ez eus ur velestradurezh. Kemer a rant perzh en deskadurezh, kempenn ha sevel hentoù nevez, terkiñ an tiriad , ar politikerezh sevenadurel .

Obererezh ha dispignoù ar strollegezhioù tiriadel a chom edan evezh **ar prefed** ha g a zo dileuriad ar gouarnamant hah ar Stad en daprtamantoù hag er rannvroioù..

## Lec'hiñ an elfennoù:

- Ar spisverkoù e Breizh
- Breizh e-barzh Frañs
- Ar 27 rannvro e Frañs

## Gouzout a ran sevel brastres aozadur an tiriad Breizh



## Geriaoueg pouezus:

**Rannvro:** strollegezh tiriadel renet get ur vodadenn dilennet (kuzul rannvro) geti barregezhioù , ur budjed dezhi hag ur galloud divizout evit meriñ an tiriad fiziet dezhi.

**Digreizennadur:** roiñ ul lodenn ag ar galloud divizout d'ar veli lec'hel (strollegezh tiriadel).

**Strollegezh tiriadel :** derez melestradurel a dalv un tiriad (kumun, departamant, rannvro).

## Vocabulaire

**Centralisation :** organisation d'un État dans lequel toutes les décisions sont prises en un seul et même lieu.

**Collectivité territoriale :** échelon administratif qui correspond à un territoire (commune, département, région). Les collectivités territoriales détiennent des compétences propres, définies par la loi, ont leur propre budget, et exercent un pouvoir de décision.

**Décentralisation :** processus par lequel l'État transfère certaines compétences aux collectivités territoriales.